

DA ZANT ADRIEN

MEULEUDI HA PEDENN

TON : Iliz nevez Molénez

DISKAN

Arvoriz, savomp hor mouez
 Meulomp hor Patron assamblez
 Meulomp hor merzer Adrien } bis
 Hag hon dezo dreizan souten }

1

Adrien 'n e genta amzer
 D'eun tirant kris ioa offiser
 Karget da lakaat d'ar mard
 An holl gristenien eus e vno

2

Hano Jezuz en o ginou,
 O joa e kreiz o holl foaniou
 An neny digor a-üs o fenn
 E zougas da c'houl sklerijenn.

3

E spered etün 'deuas abred
 Da veza treac'h d'an drouk-spered
 Hag ec'h anzavas oa kristen
 En eur drei kein d'ar fals-kreden.

4

O klevet-se, Mamimien
 C'halvas dirazan Adrien ;
 E c'hounit flour a c'hoanteas
 Ha gond' er prizoun hen taolas

5

Ar merzer en doa eur pried
 'Virit aman beza meulet
 Natali ez 'oa he hano
 Arc'heal 've mat d'he lezhano.

6

Pa glev e ' Drien chadennet
 ' Vit ar feiz en deus anzavet,
 Natali e leac'h skuilh daëlou
 Da zoue 'ro meuleudiou.

7

A c'hreg santel 'red d'ar prizoun
 Ha d'he fried ' lar a galoun
 « Eus an nenvou setu an nor
 « Dalc'h mat, Adrien, d'az tenzor.

8

« Gwelloc'h 'peus breman eget aour
 « En e genver, perlez 'zo paour
 « Da Jezuz ne renonsi ket
 « Hag e pezo gwir jaoustet.

9

Araog beza barnet da vat
 Adrien d'ar gear 'reas eun droad
 Natali 'refus d'e welet
 Asur, Jezuz en deus nac'het.

10

« Allo, Nata, na grenit ket
 « Start em feiz me chom bepred
 « Me c'houll ar zalud diveza
 Hag ive hoc'h aliou gwella.

11

Natali, neuze laouen bras
 A lamm da bokat d'he gwaz
 Arzo e zonj warzu an Env
 Da veza fidel da Zoue.

12

Neuze, kennerzet ar merzer
 A zo dispont rag ar barner
 D'e brizoun pa voe distroet
 A daoliou baz voe dispennet.

13

Mes an tirant Mamimien
 A garfe gounid Adrien :
 « Va mignon, deuit war ho kiz
 Ha d'hon doueou grit sakrifis.

14

« Nann, Adrien, 'me Natali
 Ne selaou ket komzou difei
 En henor d'hor Zalver Jezuz
 O skuilh da c'hwad 'zo eurüs.

15

E dreid, e zaouarn voe trouc'het
 E pep feson e gorf brevet
 Nata 'n e genver a chomas
 Ha da vervel e zikouras.

16

Prestik Nata ' varvas iye
 Eus an neny, Adrien lare
 « Deus, emezan, pried santel
 « Deus d'an eurüsted éternel. »

17

Nata, heb douetans ebet
 Ar ro skouer vat da bep pried
 D'en em garet bervez Doue
 Evit beza eurüs eun de.

18

Pedi a reer Sant Adrien
 Sant Memor ha Sant Bastien
 Ouz ar guentr hag ouz gwall glenved
 Da veza diwallet bepred.

19

Ar zoudard hag ar pesketour
 A gav ennan eur skoazelour
 Ra vezimp holl devot d'ezan
 Hag e vezimp eurüs gantan.